

XIII

A veac'h ho pardon ' zo digor
Ma z-eo rentet tud an Arvor ; — Sant Yan —
Ho feunteun ' zo ganto kelc'het
Daoulinet oll, o fenn stouet.

XIV

Daou zervez e veler savet
Varzuennoc'h mil breac'h goalc'het — Sant Yan —
Gant an dour euz an eienen ;
Lod all her skuill en o c'herc'hen.

XV

Ped pelerin goude raktal
A gas ar chapeled d'e dal — Sant Yan —
Hag a ra teir zro d'ho chapel
'Vit obten e vennad santel.

XVI

Gwelit : ne baouez d'ho pedi ;
Badezour eürus ar Messi, — Sant Yan —
Varnan grit eur sell a druez ;
En han' Doue, klevit e vouez.


XVII

Skuillit bennoz var bep hini
'Zo bet hirio ouz ho meuli — Sant Yan —
En o buez, var o maro
Kemerit soursi anezo.

XVIII

Ma z-eo dalc'het er Purgator,
Da vugel Sant-Nouga roit skor — Sant Yan —
'Vit ma nijo pur ha santel
Varzu an nev, a den askell.

PARREZ SANT-NOUGA



KANTIK
SANT YAN-VADEZOUR



DISKAN

Em banner bras ar binijen
Hirio selaouit hor peden —
Sant Yan — Karet hoc'h bet gant hor Zalver
C'houi 'zo profet, c'houi 'zo merzer.

I

Etouez bugale ar merc'hed
 Biskoaz ne-z-euz ket bet kavet — nikun —
 A ve brasoc'h eget Sant Yan,
 Jezuz hen lavar e unan.

II

Yaouankik c'hoaz el leac'hiou gouez
 Hoc'h bet kaset gant an elez — Sant Yan —
 Pell diouz an dud, tost da Zoue :
 C'hoüi ' jomas pur korf hag ene.

III

Na rust eo bet ho pinijen,
 Kroc'hen kanval en ho kerc'hen — Sant Yan —
 Biskoaz na gwin, na tamm bara :
 Grisiou c'hoero evit beva.

IV

Dre nerz ho mouez eil Elias
 An dezert oll a dregernas — e reas —
 Kalz pec'herien ' deuas d'ar Jourdin
 O skei gant keuz var o feultrin.

V

Setu Jezuz, Salver ar bed
 O tont da veza badezet — Jezuz —
 En er grenn e skuilljoc'h dour
 Var benn ho Mestr, Yan-Vadezour.

VI

Ma krenit dirak Mestr ar bed
 Dirak an dud ne grenit ket, — Sant Yan —
 Tav, tav, tud digaloun
 Ar profet bras n'oar ket kaout aoun.

VII

« Selaou Herodez te ' ra fall
 » Derc'hel ganez pried eun all : — selaou. —
 » Varnot ha varni eb dale
 » E pouezo dourn justis Doue. »

VIII

Eur c'hreg gant he merc'h danserez
 A reaz d'eoc'h-hu koll ho puez — Sant Yan —
 Malloz d'an danz ha d'ar visou
 Goad hag ifern ouz o seuliou !

IX

Var eur plad e kreiz eur banked
 Ho penn santel ' oue digaset — Sant Yan —
 « Sell ouz penn Yan, Herodez kriz
 » Ar penn-ze a veli noz-deiz ! »

X

Mervel zo berr, dir ar c'hleze
 D'ar merzer ' oue alc'houez an nev — e oue —
 Na c'hoüi zo kaer e lez hon Tad
 Badezour, badezet er goad !

*
*
*

Ama gwechall kaera chapel
 A c'houde an dud fidel — Sant Yan —
 Diredet euz a dro var dro
 Skuiz maro ar c'halz anezo

XII

Ar skuizder-ze n'eo ket padus
 En ho kichen, mignon Jezuz — Sant Yan —
 Dour ho feunteun ' dorr ar sec'hed,
 Ha d'an izili ' ro ' r yec'hed.